



Miz Even 2008

Evaluation de breton Niveau A2

Anv :

Skrivañ

En Orient, war ar porzh.

Greg : O ! Sell 'ta piv ? Youna ! N'eo ket gwir ! Met pegeit zo ???...

Youna : O ! Greg ! Selaou, ne fazian ket ma lavaran 5 bloaz, 6 zoken... Na buan e tremen an amzer !

Greg : Abaoe ar Skol-Veur a-benn ar fin !

Youna : Soñj 'teus eus Paskal hag Alan !

Greg : Ya, sapre mignoned e oamp...

Youna : Nag a festoù brav hor boa graet...

Greg : Ya !

Youna : Ma, petra emhout oc'h ober e kêr an Orient ?

Greg : Distro on da welet ma zud hag ober a ran ma mad eus se evit ober un tamm tro war ar porzh. Na te ?

Youna : Ul labour am eus kavet en un ti-bank e kreiz-kêr. Emaon o vont da zebriñ, lipr on betek 1e30.

Greg : Ha ma !

Youna : Debret 'teus ? C'hoant 'peus da zebriñ un tamm ganin ha kaozeal ?

Greg : Ya, gant plijadur ! Da belec'h ez aimp ? Da davarn ar Roue Morvan ?

Youna : OK. Ne vo ket diaes kaout soñj eus an amzer baseet eno ! Paskal, hor mignon kozh, a labour en davarn !... Ac'hac'hac'ha !



Miz Even 2008

E tavarñ ar roue Morvan en em gavont gant Paskal, o mignon kozh pa oant er skol-veur. N'eus ket kalz a glianted ha Paskal a chom da varvailhat – da gomz – gant Greg ha Youna. Mont a ra ar gaoz war o buhez hiriv, o labour... pe war an amzer ma oant studierion, war ar vakañsoù o doa tremenet kevret, war o mignoned ha mignonezed kozh...

Ijinit o c'haozeadenn.

Evezhiadenn : Sevel un diviz bev ha heuliet. Pep unan a gemero meur a wech ar gaoz.

A la Taverne du Roi Morvan, ils retrouvent Pascal, leur camarade de l'époque où ils étaient étudiants. Comme il y a peu d'affluence, Pascal s'attarde à causer. Ils évoquent ensemble leur vie aujourd'hui, ce qu'ils font, leur travail... ou bien encore le temps de l'université, les vacances passées ensemble, ce que sont devenus leurs amis d'autrefois...

Imaginez la conversation.

Note : Rechercher une conversation vivante, naturelle. Plusieurs répliques pour chaque intervenant.

: _____

: _____

: _____

: _____

: _____

: _____

: _____

: _____

: _____

: _____

: _____

: _____

: _____

: _____